

Evit henori tud koz Landrevarzec

1.

Hirio parrez Landrevarzec
Enn deuz preparet eur banket
Evit henori an holl dud vad
Hag a zouk ken skaon tout o oad.

2.

Ia kalz poaniou hag trubuillou
A kement a chenchamanchou
Hed ar vuez o peuz gwelet
Mes bepred c'hui peuz kendalc'het.

3.

Mes hirio war an tam-douar
A ve gwelet traou ken dispar
Ar c'hiri-nij, an traeteriou
Hag tout an holl seurt aoutoio.

4.

A mar teufe tout hon tud koz
D'ober eur bale enn hor bro
Ken founnuz e vezin spontet
Buhan en-dro d'a gaout Sant Per.

5.

D'ar baradoz, buhan en dro
Eno a vezo bepred repos
Breiz-Izel a zo holl chenchet
Doue n'euz en ankounac'het.

6.

Eun tammik eo gwir an dra-ze
Mez bars a pevar c'horn ar bed
An dud desket braz a zo koz
Gant an digas bepred azaoch.

7.

Ni ive a ve souezet
Aliez vemp gwall stravouillet
O pourmen war an hentchou bras
Gant kalz a spont, ia d'a gaout glas.

8.

Erfin, red eo d'eomp n'im ober
Beva kontent, eun tam fier
D'a veva eun amzer ken kaër
Meuleudi reomp d'ho C'hrouer.

9.

Hirio e iliz o farrez
A greiz kalon o peuz kanet
En henor da Sant Gwénolé
O Patron braz kichen Doue.

10.

A pe teuio karig-an-ankou
Ken siual : a neb eun tam-trouz
Sant Per, porcher ar baradoz,
Mar plij digorit deomp an nhor.

11.

Ma zaimp da veuleudi Doue
Bepred hed an eternite
E kichen tout ar Vretonet
Hag an holl Zent d'euz Breiz-Izel.

12

Ia holl tud koz Landrevarzec
D'hor feiz koz a zo tout fidel
D'a stereden o badiziant
Ia beteg heur o zremenvan.

Anna d'euz Kerne.